

DIR-NA-DOR

AR CHIMINAOU

PEZ-C'HOARI

EN DAOU ARVEST



— 1925 —

EMGLEO SANT-ILTUD EO PERC'HEN AL LEVR-MAN

10687

18


DIR-NA-DOR

891.
682
LEN

AR CHIMINAOU

PEZ-C'HOARI

EN DAOU ARVEST



—≡ 1925 ≡—

AR CHIMINAOU

Pez-c'hoari e 2 Arvest

Eun ti diwar ar mēz, ha diou zor warnan, unan a bep tu. — Gwiskamanchou a c'hiz vremen.

C'HOARIERIEN

ERWAN, *mab Turwall*, 28 vloaz.
TURWALL, *labourer*, 55 vloaz.
MARIANNA, *gwreg Turwall*, 60 vloaz.
MARC'HARIT, *merc'h Turwall*, 19 vloaz.
ANNA, *c'hoar Turwall*, 65 vloaz.
MONIG, *mater vihan*, 14 vloaz.
SOAZ, *danvez gwreg Erwan*, 15 bloaz.
DAOU ARCHER (*ne vezint ket gwelet*).

ARVEST I

DIVIZ I

MARIANNA — MARC'HARIT

MARC'HARIT, *d'he mamm, a zo 'o tont en ti*

Perak, mamm, oc'h savet ken abred-man? En deizioù all, e chomec'h en ho kwele betek nao eur?

(Marianna a ya da zigeri ar pres ha ne respont ket).

Mamm, lavarit d'in eta perak oc'h savet ken abred man?

(Marianna a furch er pres, ne respont ket).

O mamm, perak ne respontet ket ac'hanon?... (*O ouellan*) Petra 'm eus grêt d'eoc'h?... (*O vont da gregi en he dorn ha da bokat d'ezi*) Perak ne chomit ket en ho kwele pegwir oc'h klanv?

MARIANNA, *heb ober van ahendall*

Te zo aze? Sell hag eman ma c'houef ervat?

MARC'HARIT

Mamm! Pelec'h 'c'h if da vont ha c'houi klanv?

MARIANNA, *o kempen he dilhad*

D'an oferenn, ma merc'h, da drugarekat an Otrou Sant Erwan benniget... da vezan digaset ho preur d'ar gêr.

MARC'HARIT, *mantret*

Ma breur d'ar gêr? (*Gant spont*) Ma Doue! Mamm eo troet he spered!!...

MARIANNA, *oc'h achui d'en em wiskan*

Ya, hirio e weloc'h ho preur... An Otro S. Erwan en deus diskouezet anezan d'in fenez dre ma c'houisk... (*Gant nerz*) Hag an Otro S. Erwan, biskoaz n'eo manket d'in! (*Gant eur mousc'hoarz tener*) Ma merc'h, livirit war ma lerc'h: Ra vo meulet hag enoret an O. S. Erwan en deus, goude seiz vloaz, digaset d'ar gêr ar bugel kollet! — (*En he zonz he-unan*) Ya, seiz vloaz a vo d'ar foenn abaoe m'eo partiet ha tri bloaz 'zo tremenet abaoe n'em eus bet kelou ebet digantan!!! — Livirit ganen, ma merc'h: « Ra vo meulet hag enoret an O. S. Erwan!

MARC'HARIT, *an daerou en he daoulagad*

Ra vo meulet hag enoret an O. S. Erwan!!

MARIANNA, *seder*

Breman me a ya d'an oferenn!

MARC'HARIT

Mar d'oc'h krenv awalc'h, mamm, da vont betek ar bourk?

MARIANNA, *o tizrei 'n eur vont ermêz*

An O. Sant Erwan a zo o sikour ac'hanon. Fenez, hen en eus rentet d'in ma nerz.

(*Mont a ra ermêz.*)

DIVIZ II

MARC'HARIT

Me 'ya da c'hervel Monig da vont war he lerc'h!... Monig! Monig!

DIVIZ III

MARC'HARIT — MONIG

MONIG, *o tont*

Ezomm peus ac'hanon-me, Marc'harit?

MARC'HARIT

Ya!... Mamm zo et d'ar bourk d'an oferenn. Eman e paouez mont ermêz eus an ti... Kerz war he lerc'h dioustu ha töl plê mat outi... Aon am eus na gouezfe war an hent...

MONIG, *souezet*

Moereb a zo savet?...

MARC'HARIT

Ya! Kerz 'ta ha hast buan!

(*Monig a ya ermêz prim.*)

DIVIZ IV

MARC'HARIT, *hec'h unan, o kroazia he daouarn*

Biskoaz n'am oa gwelet mamm evelse!!!... Sur mat eman o tanzen koll he fenn gant an drubuilh!... Dre forz sonjal em breur ha gortoz eus e gelou, eo deuet mesket he spered.

Eun toulad deizioù 'zo ne rae nemet komz d'in eus a Zant Erwan... Hirio eo anat n'eman ket ken en he spered vat! « S. Erwan, emezi, he deus gwelet!... Ma breur a ar-ruo hirio! » Siouaz! hunvreou holl eo kement-se! Ma breur a zo maro, marvat, ha piau 'oar pelec'h, du-ze er broiou krec'h?... Tri bloaz zo hep kelou ebet dioutan!...

Ma 'n dije gallet mamm ankounac'haat, da vihanan!... Met ne zonz nemet ennan! Ma zad ne gomz anezan gwech ebet ha mamm ema he fenn gantan dalc'hmada!... Hag o-daou emaint aze, koulz an eil evel egile, o tizec'han diwar o zreid!

Ma Doue! pegen trist eo an ti-man! N'eo ket bara a vank, koulskoude, met abaoe m'eo partiet ma breur, abaoe seiz vloaz, ma zad ha mamm n'o deus grêt joausted ebet. Kanvou a zo en ti-man abaoe!... Ma zad a zalc'h da vont, ha red d'ezan, abalamour d'al labour, pegwir n'eus nemetan hag eun devejer... Met setu mamm 'zo o ruzan daou vloaz zo... ha breman, mar eo deut sod!... O ma Doue! mar en dije gouezet ma breur, pa oa o tec'hel rôk e benn, pesort reuz a chache warnomp!!!

... Heman 'zo eun ti kollet!

(*Gouelan ra.*)

DIVIZ V

SOAZ — MARC'HARIT

SOAZ, *o tont gant prez*

Me 'm eus klevet e oa tremenet moereb Marianna e Kroaz-ar-Run, breman souden? Ha gwir e vefe?

MARC'HARIT, *trist*

Ya, Soaz, et eo d'an oferenn!

SOAZ

Arru eo yac'h eta?

MARC'HARIT, *o huanadi*

Gwasoc'h 'vit klenved a zo deut d'ezi!

SOAZ

Petra?... Gouelañ rez? Hast kontan d'in petra zo arru?

MARC'HARIT

Me 'm eus aon n'he deve mamm kollet he skiant er wech-man!

SOAZ, *mantret*

Petra lavarez?

MARC'HARIT

A greiz holl eo savet eus he gwele, êt d'ar pres da glask he dilhad... Gwelet he devoa Sant Erwan en noz-man, emezi, hag e oa o vont d'ar bourk d'e drugarekât...

SOAZ, *souezet*

D'e drugarekât?

MARC'HARIT

... Rak disklêriet en devoa d'ezi e oa hirio an deiz... da... da... ma Doue! paour kêz mamm!

SOAZ

Lavar 'ta!... an deiz da betra?

MARC'HARIT

An deiz da... da.. Erwan d'arruout er gêr!

SOAZ, *o chench liou, 'n eur bouezan war bep gir*

An deiz da... Erwan d'arruout er gêr?

MARC'HARIT

Hunvreou, paour kêz plac'h! He spered a zo êt da redek!... Et eo, — ha ne dalveze ket d'in êsat harz anezi! — êt eo d'an oferenn da drugarekât an O. Sant Erwan... Me 'm eus kaset Monig war he lerc'h, betegout 'n arruje droug ganti.

SOAZ, *en he zonz hec'h unan*

Neuze eo krenvaet kalz, da vihanan, pegwir eo êt d'an oferenn?

MARC'HARIT

An Otro Sant Erwan, emezi, en devoa digaset nerz d'ezi.

SOAZ, *eviti hec'h-unan*

Seblant e c'hatfe ive digas...

MARC'HARIT, *hag he deus klevet*

Siouaz, plac'h paour! An derzien, 'n hini oa o souten mamm! Ma 'z tije gwelet pegen lemm e oa he daoulagad! Na pa vefe red digas anezi d'ar gêr gant eur c'harr, ne vefen tamm souezet.

SOAZ

Ha da dad, goût a ra kement-se?

MARC'HARIT

Ra ket, a c'hras Doue! Eman er park. Met pa ouezo, hen ha n'eo ket evit gouzanv e vefe lâret, zoken, hano Erwan dirakan...

SOAZ

Bopred?

MARC'HARIT

Bopred? Gwasoc'h 'vit biskoaz! Seul-vui e wel mamm o kemer trubuilh gant Erwan, seul-vui e teu e spered da drenkan hag e sav droug ennan eneb d'ezo o-daou. En deiz diagent dec'h, Fanch an devejer a lâras eur ger bennak diwarbenn ma breur, epad koan... Darbet e voe d'am zad teurel anezan er porz raktat!... Pa c'hoarvez traou evelse, mamm, neuze, a ya ermêz anezi hec'h unan. Tamall a ra pep seurt traou d'am zad; lavaret a ra d'ezan eo eun den kris, ne gar ket e vab, ne gar ket e dud!... Ah! aman vez buheziou! Ha sonj pebez rann-galon evidon! Me oar a-walc'h eo gant ma zad eman ar wirionez; met n'hallan biken mont eneb d'am mamm, pa welan anezi prest da gouezan diwar he zreid!...

Aman vo eun devez c'hoaz hirio! Krenan ran gant ar spont, pa zonzan; Breman zouden, da greizteiz, ma zad a arruo d'e verenn ha pa glevo...

SOAZ

Berz moereb da devel.

MARC'HARIT

Ne chileo ket ac'hanon an disteran!... Ahendadl, aon am befe da greski he foan!... He speied a zo ét kement 'barz ma breur! Oh! ma ouesfe hennez nag a zaerou 'zo bet skuilhet aman abaoe m'eo partiet 'rôk e benn!

SOAZ, *trist*

Ouspen aman zo bet skuilhet daerou!

MARC'HARIT

Ya, Soaz kêz, me oar awalc'h, te peus bet ivez poan-galon ouspenn eur wech! Grêt promesse d'it da zimezi, ha mont endro ha tremen hep rei kelou. Ha bepred out chomet feal d'ezan?

Oh! ya, ma ouesfe pegement eo karet aman! Bêtek ma zad am eus tapet eun devez, ha n'eus ket pell c'hoaz, o ouelan dirak poltred Erwan, ar poltred en devoa tennet arôk e zervij, kent mont d'ober e vloaz. Ya! ma Doue, ma ouesfe petra en deus disprizet. Met bah! petra datv hirvoudi? Marvat, ne glevo ken ac'hanomp; maro eo ha, marteze, 'baoe pell 'zo!

SOAZ

Na lavarez ket ze, Marc'harit, en han ' Doue! Re a boan a rez d'in! Biken ne gredin eo maro! Me 'zo 'vel da vamm; me 'c'hortoz bepred, bepred!

MARC'HARIT, *a gostez*

Paour kez plac'h!

(Klevet a rêr trouz ouz an treujou).

SOAZ, *o sellet*

Arru 'zo unan bennak.

MARC'HARIT

Daoust ha mamm e vefe?

SOAZ, *o sellet adarre*

N'eo ket! Eur paour bennak eo pe eur galomper, diouz gwelet e stumm!

MARC'HARIT

Serr an nor, ne deuio ket en ti!

SOAZ

Deut ha tout eo!

MARC'HARIT, *o vont da zerri an nor hag o souzan*
O ma Doue!

Tostat a ra da Soaz.

DIVIZ VI

ERWAN — SOAZ — MARC'HARIT

ERWAN

N'ho pet ket aon! Me n'on ket deut aman d'ober droug... Met eun tamm bara a rafe vad d'in!...

MARC'HARIT, *da Soaz*

Troc'h te eun tamm bara d'ezan!

(Soaz a droc'h bara hag Marc'harit hen c'hinnig eus a-bell d'ar galomper).

ERWAN, *o sellet outi eur pennad, dilavar*

Trugarez!

(Mont a ra ervez)

MARC'HARIT, *o vont da zerri an nor war e lerc'h*

Dibôt eo gwelet eun den ken stummet fall! Me 'm beus bet aon ken e krenan c'hoaz! A drugarez Doue, e oas aze ganin!... Ne peus ket tôlet plê pesort sellou en deus grêt en eur zont en ti?

SOAZ

Bah! an dud-ze alies n'int ket ken falt da gavout 'vel da welet!

MARC'HARIT

Ac'h! Rukunus eo gant e zilhadr lous ha truilhennek hag e varo hir ha luier! Gwelet ez peus ivez pesort pikol treujenn a oa gantan oc'h ober eur vaz? Ma ne vijes ket bet aman, n'ouzon ket pelec'h am bijen em voutet en e rôk! Chom ganen gant aon na zizrofe!... Peotramant, serromp an nor ha deus, ma 'z aimp da Bark-ar-stang da lakat dilhad da zec'han... Eno zo merc'hed o kannan...

Pa vo alc'houezet an nor, ne deuio ket en ti. Red eo d'in avat, lakat an alc'houez dindan an treujou, betegout na dizrofe mamm ha Monig e keit-ze... Deus!...

SOAZ, *o chom a-zav*

Da vamm a gred d'ezi e teuio Erwan hirio d'ar gêr. Marteze eo hennez eo Erwan?

MARC'HARIT

O Soaz! Serr da c'henou! N'ouzout ket petra lavarez!

SOAZ

Petra ez pije grêt, mar en dije bet disklêriet d'it: Me eo Erwan, ho preur!

MARC'HARIT

Na gomzez ket d'in a draou evelse! Me oar petra 'm bije grêt?? A drugarez Doue, n'eo ket Erwan eo! Erwan n'eo ket kromm, na livet fall na ken doun-ze e zaoulagad en e benn, na ken garo-ze e vouez...

SOAZ, 'n he zoni

Seiz vloaz a zigas chenchamant en eun den!... Deomp da lakat da gouez ermêz!

DIVIZ VII

ERWAN, o tizalc'houezan an nor hag o tont en ti

Dindan an treujou ve laket bepred an alc'houez!

Eur pennad mat e chom da zellet endro d'ezan hep komz.

N'eus man chenchet dre aman! N'eus nemedon hag en eus chenchet! Na ma c'hoar na Soaz n'o deus anavezet ac'hanon!... Rukun o devoa ouzin!... Mar gallfe an traou aman komz, marvat e lavarfen d'in ivez: « Kerz ermêz, ailhon! »

Ah! n'eus forz! Aman emañ er gêr! Kaer o devo an dud hag an traou rebarb ouzin: « Kerz ermêz, chiminaou! » bopred aman emañ er gêr hag aman e chomin! C'houi 'gav d'eoc'h ne ra ket e vad arruout er gêr goude bezan bet seiz vloaz hep gêr ebet? Ma n'ouzont ket ze aman, me oar! Ya, eun dra vat eo arruout er gêr! (*Izeloc'h*) Hag eun dra fall e gwitât!

Oc'h azezan.

Red e oa d'in arruout aman benn gallout diskiuzan... Seiz vloaz so ne oan ket bet 'n em êz evel m'en em gavan aman, e korn an oaled, o krignat an tamm bara zec'h stlapet d'in gant ma c'hoar!

... Ya zur, kemer a raint ac'hanon evel mac'h on ec'h on! Lakat a raint ac'hanon, ma karont, e loj ar c'hi, met n'in ket ac'han ken!

O sevel hag o skei gant e vaz.

Ya! ya! me oar a-walc'h pep hini a lavaro e c'hir: Te? piou out te? Eun ailhon! eun den digalon! eun ever! eur fouet-boutik! eur galomper! eur chiminaou! » Ya! ya! met bopred Erwan an Turwall eo ma hano! Aze, er gweteze on bet ganet! Er gwele all-ze am eus kousket epad ugent vloaz! Hennez a oa ma fres! Houman oa ma skabell! Den n'hall lavaret n'emaon ket aman er gêr!

Ha koulskoude, marteze vin kaset kuit! Ma zad, ma mamm a lavaro d'in: Pa oamp kas gwetec ac'hanout o chom, e oas et n'ez tro; breman, p'emaout kas dizrei, kerz adarre! N'eus ezomm 'bet ac'hanout ken! Kemeret eo da blas! »

Vit kelo ze, n'on ket maro!

Sur a-walc'h, o devo mez ganen! Ne gredint ket anzav ac'hanon... Me a oa eur pôtr moust gwechall... Sell 'ta, sell aze e-pign ouz ar fenestr ma foltred tennet er bloaz ma oan et d'ober ma zervij.

Sellet a ra outan en e zorn ha lezel e vrec'h kleiz da gouezan,

N'eus forz! Bepred eo me eo hennez! Bepred eo me eo Erwan an Turwall! Ma arru ma zad aze breman souden, me lavaro d'ezan: « Me eo Erwan! » Daoust petra rei? Bepred me zo mestr aman war e lerc'h!

Kredi ra d'ezan klevet trouz hag e lamm da doull an nor.

N'eus den! — Ma! sell aze ha kentan sonj am eus bet eo da vont kuit! Ma dilhad zo kôz! Mar vijen gwisket evel ma 'c'h on war ma foltred, e vijen hardisoc'h! Marteze zo aze dilhad diouz ma ment!

Mont a ra d'ar pres, hag e tenn eur gwiskamant, an eil pezh goude egile.

Mat! eur bragou! eur chupenn! eun tog! Gant ar re-man, marteze, vin gwelloc'h stummet ouz Erwan an Turwall a zo aze e pign!... Chench kroc'hen eo red d'in!

(Tennan a ra e chupenn vreïn ha teurel a ra anezi eno).

Kerz diwar ma c'hein eta, porpant milliget ar broiou krec'h! Pell a-walc'h ez peus poazet ac'hanon!

P'eman o vont da wiskan ar chupenn all, e klev trouz hag e tec'h 'vel eul laer, o kas gantan dilhad ha tog.

DIVIZ VIII

SOAZ — MARC'HARIT

MARC'HARIT, *mantret*

Gwerc'hez Vari! Digor an nor! Digor pres ma zad!
Soaz! Soaz! Al laer zo bet aman!!...

O vont d'ar pres.

Et gantan dilhad d'am zad.

Soaz, o kregi er chupen tôlet war an douar

Ar chupenn-man!

MARC'HARIT, *o sellet*

N'eo ket hounnez chupenn ar chiminaou zo bet aze 'vid
ar beure?

SOAZ

Eo, avat! Hounnez am eus gwelet war e gein!

MARC'HARIT, *strafilhet*

Difiziens am oa e oa hennez eut laer, diouz ma selle
endro d'ezan! Ec'h an da glask ma zad!!

DIVIZ IX

AR MEMEZ RE — MONIG

MONIG, *o tont en ti*

Ho mamm a zo chomet eur pennad er bourk da ziskwi-
zan e ti ho moereb Anna. Benn breman e tle bezan deut
ac'hano...

MARC'HARIT, *hep chilaou*

Ha bet al laer aman!! Peus ket gwelet anezan war da
hent?

MONIG

Al laer? Piou?

SOAZ

Ne peus ket gwelet eun den barvek ha stummet fall,
gant eur pikol baz hag eur bakadenn z'had?

MONIG, *o hursuni*

Nann!

MARC'HARIT

Daoust war be tu eo et! Kerz buan da glask ma zad ha
lâr d'ezan dont d'ar gêr raktal!

(Monig ermêz).

SOAZ

Ha ni, deomp bepred da benn hent ma mamm.

(Serri ra an nor hag ermêz).

Ar gouel a gouez.

EIL ARVEST

DIVIZ I

TURWALL — ANNA

ANNA

Ma breur, goût a rez, Marianna a zo du-man? Re skwiz
e oa da zont ganen d'ar gêr. Da verc'h a zo chomet ganti.

TURWALL

Klevet am oa gant Monig e oa Marianna du-ze. Met te-
c'het e oa ze diganin!... Me 'zo va fenn gant al laer!

ANNA

Petra 'ta eo al laer-ze a zo bet er beure-man o spontan
Marc'harit?

TURWALL

Eur chiminaou bennak, a zo bet aze hag en deus tapet
dilhag diouz ar pres ha kaset anezo gantan!... Ar rederien-
ze n'int ket tud abof; heman, da vihanan, vo paket hep-
dale, rak kaset am eus Monig, gant eur paper, da zigemen
d'an archerien...

Met penôs eman ar bed ive gant Marianna? Gwelllaet
eo d'ezi 'ta en eun töl krenn? Er beure-man e oa 'n he
gwele p'oun et d'ar park!

ANNA

'N eur stumm eo gwelloc'h ha 'n eur stumm all...

TURWALL

'N eur stumm all?

ANNA

Vit lâret d'it ar wirionez, ma breur ker, me 'm eus aon na ve deut da wreg sot...

TURWALL, *nec'het*

Sot?

ANNA

Arabad spontan, 'velkent, rak...

TURWALL

Petra ra d'it kredi?...

ANNA

Arruet eo bet du-mañ goude an oferenn hag e kaven e oa mesket he daoulagad... Dal m'eo deut en ti, he deus kontet d'in e oa Erwan...

TURWALL, *têr*

Erwan adarre? Na lavares ket te, da vihanan, an hanoze dirakon!

ANNA

C'houi ? zo re dêr, ma breur. Ne ven ket souezet e ve gant aon ouzoc'h e ve deut Marianna da...

TURWALL, *o troc'han krenn*

Lavar d'in petra gonte d'it?

ANNA

... He devoa gwelet Sant Erwan hag en devoa diskleriet d'ezi e teuje hirio he mab Erwan d'ar gêr!

TURWALL, *goapaüs*

Ah?... Al laer, da vihanan, zo deut!!

ANNA

Eun töl 'zo skoet 'n em c'halon: « Doue da viro! mon-me; 'm eus aon Marianna a zo o tont sod! »

TURWALL

Sod eo, sur, ha war zotaat bemdez, pegwir al lamponze ne baouez ket hi da zonjal ennan na noz na deiz!

ANNA

Ha koulskoude, mar vefe gwir he hunvrei Marianna he deus pedet kement evit ar paour kêz pôtr-ze! Eur vamm vat, Turwall, seurt ne gaver ket ken, nann, paz unan hepen!

TURWALL, *c'houero*

Ha me eo fallan tad a zo, n'eo ket gwir?

ANNA

Nann, n'out ket; eun den têr ha techet da zerc'hel droug, ze ne laran ket!

TURWALL, *garo*

Derc'hel droug? Ah! pennou diboeil ma 'z oc'h! Eun tad en e di ne dle ket plegan, gant ar wirionez! Gwech ebet!

ANNA

Ya, met ma tizrofe da vab, ne ve ket dleet d'it, forz pegen diskiant eo bet, ober digemer fall d'ezan! Pa oa tec'het diouz ar gêr, anzav a ran e oa ar gaou gantan penn-da-benn; breman, avat, ma teufe war e giz hag e serrfes an nor outan, e lakfes ar gaou en da du.

TURWALL, *gorrek ha lemm*

Te n'out ket evit sonjal pesort gouli a vagan aze 'n em c'hreiz abaoe m'eo paouezet ma mab da skrivan d'in! — Eun druez eo, 'velkent, ma c'hoar, e teufes, war zigarez hunvreoù tud klanv, da c'hoari gant ma foan, da lakat ma c'halon da wadan a-nevez-flamm!...

ANNA

Ne grede ket d'in e oas ken poaniet ze!

TURWALL

Nann, rak ne gomprened ket petra eo bezan tad — na petra eo bezan penn-tiegez, — na petra eo bezan eur gwir Vreton!

Evel tad, daoust ha me c'hall bezan laouen o welet ma mab o tec'hel diganin, o paouez, zoken, da rei d'in eus e gelou? — Evel penn-tiegez, daoust ha n'eo ket eur rann-galon evidon gwelet an hini a dlee kemer an dorn war ma lerc'h, o tilezel ar garg a zigoueze dezan hag o leuskel an ti da gouezan en e boull? — Hag evel Breton, — rak Breton on, ma c'hoar, — me oa lorc'h ennon o welet am oa eur pôtr yaouank gouest da viret ha da greski holl vadou hag enor hon bro c'hinidik! — hag ar maleürus zo ét da werzan e vro ha da vastari hon hano... da... C'hal!!!!...

ANNA

Da vastari hon hano? Te oar ze?...
Eun den aheurtet out, red eo lavaret, Turwall!

TURWALL

Aheurtet, ya, pa vez ar wirionez ganen!

ANNA

Ha mar teufe da vab, hirio pe eur wech all, da c'houl-
len digor diganit, petra rafes?

TURWALL

Me n'am eus mab ebet ken! Gwaz evidon ha gwaz evi-
tan, mar deo beo c'hoaz!... Ha breman peoc'h gant ar gôz-
ze! N'am eus ket amzer da goll pelloc'h! Kenavo!

ANNA

Me n'am eus man d'ober aman, mar 'c'h ez te e-kuit!
(*O-daou ermêz, pep hini diouz e du*).

DIVIZ II

ERWAN, *o tont en ti*

Diou wech on antreet en ti-man hirio... An dro-man,
an dervet gwech, e renkan chom! Klevet am eus, eus solier
ar foenn aze, e vije digaset an archerien aman breman
souden... Red eo d'in 'n em rei da anaout! Erwan Turwall,
mar eo beo ma mamm, — rak n'am eus klevet doare 'bet
diouti c'hoaz!! — a gousko aman fenez! — Sell arru ma
'zad!!!!...

DIVIZ III

ERWAN — TURWALL

TURWALL, *a chom en e zav ouz an nor da zellet ouz an
estranjour-ze baro hir.*

Piou oc'h-hu ha petra glaskit aman?

*Erwan, pleget e benn, na respont ket. Turwall
a dosta outan hag a c'houlenn adarre kren-
voc'h.*

Piou oc'h-hu ha petra glaskit aman?

Erwan na gred na komz na zevel e benn.

TURWALL

Ne deuer ket e ti an dud all pa ne ve den er gêr ha serret
an nor!

ERWAN, *o vouskomz skeudik*

N'emaon ket e ti an dud all!

TURWALL

Eo sur! (*A gostez*) Evet en deus eur bannac'h re! Poan
en deus o komz!

— N'em dromplet ho po war ho hent! Pelec'h e kred
d'eoc'h bezan aman?

ERWAN

Er gêr!

TURWALL

(*A goste*) Meo eo! (*Krenv*) Er gêr? Da belec'h 'ta ho
poa da vont?

ERWAN

D'ar Run.

TURWALL

N'oc'h ket kouezet fall! Met lies a di a zo er Run! Da
di biou e felle d'eoc'h mont?

ERWAN, *gant nec'hamant*

Da di Turwall!

TURWALL

Emaoc'h en e di ha dirakan (*O sellet piz outan*). Hag
ho peus... petra d'ober... gantan?... Eur marc'hadour ben-
nak oc'h?

ERWAN

N'on ket!

TURWALL

Piou oc'h 'ta neuze?

ERWAN

Me... me... me... eo... me, eo... ho mab Erwan!

TURWALL, *a deu prim da zellet outan hag a souz war e
giz betek an dôl hag a ro eun tol dorn warni.*

Ma mab? Ya, bet out! Met n'out ket ken!

ERWAN

Eo, ma zad!

TURWALL

Erméz! Ha dioustu!

ERWAN, *o sevel e benn*

Me 'zo ac'han koulskoude!

TURWALL

Ma karjes vijes bet!

Kregi ra 'n e vrec'h.

ERWAN

Lazit ac'hanon, mar kirit, aman e chomin!!!

Turwall en em lez da gouezan war ar bank-tol.

DIVIZ IV

AR MEMEZ RE — MARIANNA — MARC'HARIT

MARIANNA, *o welet Erwan, a astenn he diouvrec'h d'ezan hag a goue hanter-zemplet.*

Ma mab!

MARC'HARIT, *o sellët ouz an den, en eur zouten he mamm.*

Hennez? ma breur? (*a goste*). Sur awalc'h, mamm eo troet he spered!

MARIANNA, *o komz*

O-Sant Erwan, bezit trugarekaet!

Asten a ra he diouvrec'h da Erwan. Heman a bleg e benn muioc'h-mui.

MARC'HARIT

Mamm, lezit hennez! Hennez eo ar chiminaou zo bet aman 'vid ar beure hag en eus faeret dilhad eus ar pres. Dilhad ma zad zo gantan!

MARIANNA

Ma mab Erwan! ma mab Erwan!

TURWALL, *o sevel*

Marianna, gwall brim ez it! me 'zo mestr hag evel ma livirin e vo grêt!

Arôk bezan na tad, na mamm, eo red aman bezan barner!

(*Da Erwan*).

It da gerc'hat ho tilhad ha diwiskit ar re-ze! N'oc'h perc'hen ebet d'ezo!!

ERWAN, *tenir ha trist*

Klevet a ran... ha senti rin! — Mamm, lezet ac'hanon!

MARC'HARIT

E vamm!?!?...

MARIANNA

Kerz! ma fizians a zo en Otrou S. Erwan!

TURWALL

Na glasket ket dislavaret ac'hanon na stourm ouz ar pezh am eus d'ober! C'houi, Marianna, a anzav anezan; ouспен c'houi 'zo da gomz aman!

(*Erwan a dizro gant e zilh*).

MARIANNA, *frommet*

Gwerc'hez Vari! Penôs emañ, ma mab paour!

TURWALL

Marc'harit, deut aman 'n em c'hichen!

O tiskouez Erwan.

Sellit outan! Setu aze ho preur!

MARC'HARIT

Ma breur? Oh!...

TURWALL

Ho preur eo! Ho preur e vo, mar plij ganeoc'h anzav anezan. Setu hen dirak ho taoulagad! Setu hen, evel m'eo rentet, galomper ar broiou krec'h!...

— Daoust ma n'oc'h nemet eur plac'h, daoust ma 'z oc'h yaouankoc'h evitan, gwir ho peus da varn anezan, rak c'houi 'zo ac'han! N'hoc'h eus ket dilezet ho tad hag ho mamm! N'hoc'h eus ket dilezet ho ti hag ho parkou! N'hoc'h eus ket dilezet ho pro! Epad seiz vloaz, c'houi ho peus sikouret dougen ar zamm en devoa lezet heman war hon choug da zougen. Ac'hanta, ma merc'h, gwir ho peus breman, c'houi, da zigeri d'ezan dor an ti-man pe d'he serri, da lavaret d'ezan: « Ma breur, deus! » pe da lavaret d'ezan: « Divroad, kerz endro! »

Dibabit evitan ar gomz a garoc'h!

An holl a zo dilavar.

MARC'HARIT, *abof*

Gwir eo... oc'h... ma breur??

Erwan ne respont ket; plegan ra e benn 'n eur dorchan e zaoulagad.

(*D'he zad*) ma zad, gouelan ra! (*Da Erwan*) Gwir eo...
oc'h c'houi... Erwan? (*D'he mamm*) Mamm, sur oc'h eo
Erwan eo?

MARIANNA, *he zellou lemm ha tener war he mab, gant
eur vouez skiltr.*

Daoust ha kalon eur vamm a c'hall en em dromplan?

MARC'HARIT

Neuze 'ta... neuze... me vo ho c'hoar!

*Luskan ra mont trezek d'ezan, met an tad a gomz
hag a grog 'n he brec'h.*

TURWALL

Galvit aman Soaz!

DIVIZ V

AR MEMEZ RE — SOAZ

SOAZ, *o tont en ti*

Setu me, ma contr!

MARC'HARIT, *da Soaz raktal*

Oh! Soaz, dizro eo Erwan!

SOAZ, *o sellet endro d'ei, abof*

Pelec'h?

TURWALL

Tostait!... Setu aze Erwan!

SOAZ, *souezet ha touellet*

Hâ! â!...

TURWALL

Setu aze danvez ho pried! Anzav a rit anean c'hoaz?

*Soaz a chom mut, he zellou mantret war Erwan.
Heman a demzav e benn hag a ra eur zell
tener ha trist outi.*

MARIANNA, *azezet, o kuzan he daoulagad gant he daou
zorn.*

Pebez merzerenti! Velkent!

TURWALL

Al lezenn 'zo evelse!! N'eo ket a-walc'h karantez! Da
gentan, *ar justis!*

SOAZ

Gortozet em eus Erwan epad seiz vloaz; bet on feal
d'ezan; fiars am eus eo bet feal d'in...

ERWAN, *izel*

Ya! (*Eur pôz ha war grenvaat, dre ma komz*)... Pa gwi-
taïs ar gêr, ne ouien ket da belec'h ec'h aen... nemet e
fizien 'barz lavariou tud hag am oa anavezet er c'hazern...
Hepdale e ouezis e oan diroutet hag a damm da damm e
kollis kalon da labourat... Revolutionerien a glaskas serri
ac'hanon, met n'is ket d'o heul... Ne gaven ma flijadur
nep lec'h...

MARIANNA, *he sellou lemm warnan, gant jestrou*

Paour kêz bugel!

ERWAN

Ne greden ket dont d'ar gêr na, zoken, skrivan, bete-
gout am bije bet eur gwall respont digant... digant ma
zad!... Gwell e oa ganin dont ma-unan da glevet...

(*Ober ra eur zell ouz e dad ha ne respont ket.
Eur zell all ouz Soaz*).

SOAZ, *o vont warzu d'ezan*

Me lak ma dorn en ho hini, Erwan!

TURWALL, *o kregi 'n he brec'h*

Gortozet!...

(*Trouz a glever*).

DIVIZ VI

AR MEMEZ RE — MONIG

MONIG, *da Durwall, 'n eur zellet ouz Erwan*

Daou archer a zo aze ouz toull an nor hag a c'houlen
kôzeal ganac'h, ma contr!

*Hep lâret gir, Turwall a ya ermêz. An holl a
chom mut ha spontet.*

MARIANNA

Otro Sant Erwan! Sellit a druez ouzimp!

*Turwall a deu souden war e giz; e c'hoar Anna
zo kerkent war e lerc'h.*

DIVIZ VII

AR MEMEZ RE — ANNA

ANNA, *berr warni, da Turwall dre drek e gein*
C'hanta? kavet eo al laer??

TURWALL, *p'int deut o-daou en ti, gorrek ha tener*
Nann! al laer a zo kollet; met... ma mab am eus kavet!!
(Erwan a strink da bokat d'e dad).

AR GOUEL A GOUEZ EVIT MAT

